

## K A N T I K     S A N T     H E R N O T

-----

1. Bodet hirio en hoc'h henor,  
Ni ho ped start, Patron karet,  
Selaouit mouez an dud a vor  
Ha var ho pro beillhit bepred.

Diskan ;     Eus Rostudel betek Morgat,  
Ken a drido bleuniou ar prad,  
Ken a zono kerreg an ôd,  
Kanomp meuleudi Sant Hernot.


2. Tec'het gwechall rôk ar Zôzon,  
Eus ar Vreiz-Veur, bro e gavel,  
Var ôtchou gwenn parrez Krozon  
E touaras an den santel.

3. Hor gour-enez, en amzer goz,  
Oa beuzet en devaligen ;  
En henor d'an doueou fôs  
E rede 'r goad var bep tôlmen.

4. Mes, sant Hernot, c'hwi skub an noz  
Dre sklerder gaer an Aviel;  
Hag e pep traoun, ha var pep roz,  
E sao ar groaz, vel eur banniel.

5. Diouallit bag ar pesketour  
Dicuz an tarziou, ar barou treiz,  
Diouz ar reier kuzet en dour,  
Diouz ar pense pell eus a Vreiz.

6. Sant Patron, grit d'eomp beva  
E gras Doue, bemdez, bemnoz,  
Evit gellout ive beza  
Kurunet holl er Baradoz.



-----